

E Brasparzh (29)

E Ti Menez Are - <https://www.timenezare.bzh/>

Petra eo skol-hañv Ar Falz ?

Ur staj yezh

Dre gentelioù, atalieroù hag ar c'han e c'hallo pep heni deskiñ pe peurzeskiñ ar brezhoneg gant kelennerien a-youl vat.

Ur staj dre soubidigezh

Graet e vo gant ar brezhoneg a-hed ar staj, ar brezhoneg standard hag e stummoù disheñvel. Degemeret e vo stajidi gant al live A1 da nebeutañ hag a fell dezho deskiñ pe peurzeskiñ brezhoneg dre soubidigezh.

La langue du stage sera le breton. Il ne convient pas aux débutant-e-s, mais s'adresse aux personnes ayant déjà des bases qui feront l'effort nécessaire pour poursuivre leur apprentissage du breton par immersion.

Ur staj sevenadur

Dre valeadennoù ha prezegennoù e c'hallo kement heni anavezout gwelloc'h sevenadurioù ar vro : istor, lizheradur, buhez an dud, endro, kan ha dañs...

Degemeret e vo ar grennarded er staj dindan kiriegezh o zud.

Ar c'hentelioù

1. A1 → A2 : Implijer deraouad II
2. A2 → B1 : Implijer dizalc'h I
3. B1 → B2 : Implijer dizalc'h II
4. B2 → C1 : Implijer ampart I
5. C1 → C2 : Implijer ampart II

An atalieroù

- A. Kultur pop (Liveoù 2 -> 5)
- B. C'hoari ha dudi (L. 1 -> 2)
- C. Distagañ ar brezhoneg pemdez (L. 2 -> 5)
- D. Fardañ boutonoù mod Chelgenn (L. 1 -> 5)
- E. Kan liesmouezh (L. 1 -> 5)
- F. Skrivañ (L. 2 -> 5)

Kaset e vo ur follenn-titouroù all d'ar re enskrivet, gant framm european ar yezhoù, dezho da choaz ur gentel hervez o live.

Roll an devezh

- 8e - 9e : Dijuni
- 9e - 9e 30 : Dihun kanet
- 9e 30 - 12e : Kentelioù brezhoneg
- 12e - 12e 30 - Kan & dañs
- 12e 30 - 14e : Merenn
- 14e - 16e 30 : Kentelioù brezhoneg
- 17e - 18e 45 : Atalieroù
- 19 - 20e 30 - Koan
- 20e 30 - 22e 30 : Abadennoù

Abadennoù

- Sul 17 : Ober anaoudegezh
- Lun 18 : Kan a-stroll
- Meurzh 19 : Eskemm gouiziegezh
- Merc'her 20 : Fest-noz
- Yaou 21 : Beilhadeg

D'ar merc'her goude merenn e vo graet pourmenadennoù e Park an Arvorig .

Kaset vo deoc'h resisadurioù all goude bezañ enskrivet.

Follenn-enskrivañ

Anv :

Anv-bihan :

Chomlec'h :

.....

Kod Post : Kêr :

Kêr :

Postel :

Pellgomz :

Micher : Oad :

Den da zaremprediñ mar bez ezhomm e-doug ar staj

Pellgomz :

A gemero perzh er gentel-mañ

- 1 - A1 → A2
- 2 - A2 → B1
- 3 - B1 → B2
- 4 - B2 → C1
- 5 - C1 → C2

Atalier choazet

- A (L. 2 → 5)
- B (L. 1, 2)
- C (L. 2 → 5)
- D (L. 1 → 5)
- E (L. 1 → 5)
- F (L. 2 → 5)

Bod ha boued

Priz standard : Bod ha boued : 325 € + Frejoù pedagogel : 110 € = 435 €

Enkontet er priz : al liñserioù hag ar pallennoù.

Lakait ur groaz dirak ho choaz :

- Kambr 3 gwele 435 € dre zen
- Kambr 2 wele : 435 € + 55 € = 490 € dre zen gant
- Tud dilabour, studierien leun-amzer (kambr 3 gwele) : 385 €
- Familhoù adal 3 den er memes kambr : 385 € dre zen
- Boued hep bod : 360 €

- Boued hep kig (repas végétarien)

Goulenn a reomp diganeoc'h kas da Ar Falz ur chekenn a **160 €** evit an enskrivadur. Goulenn a raimp diganeoc'h paeañ ar peurrest **a-raok an 10 a viz Gouere 2025**. Bez e c'halloc'h kaout ar chekenn enskrivadur en-dro a-raok an 10/07 ma n'halloc'h ket dont. Chekennoù vakañsoù degemeret.

Aotreañ a ran aozerien ar staj da implijañ ar skeudennoù emañ warno evit brudañ staj Ar Falz ha ma fostel evit ar c'henweturiñ.

J'autorise les organisateurs à utiliser les photos me représentant pour la promotion du stage et mon mail pour organiser des covoiturages.

Ya : - Nann/Ket :

Sinadur :

**Da vezañ kaset en-dro, gant ur chekenn a 160 € e anv Ar Falz da Ar Falz / Skol Vreizh (Staj) - 41 kae Bro Leon - 29600 Montroulez
Pgz : 02 98 62 17 20 – arfalz@yahoo.fr**